

CANTIC NEVE 222

AN ENOR

D'AN ITRON VARIA AN AERCH

PATRONES KERBORS

Voar don : *Ar Gos-Yeodet.*

Mar me sicour des an nen,
Min a rei eur hantic neve
Vit enorin Goerhes an Aerch :
D'an Tad eternal ez eo merch.

Ar Voerhes Vari na voa quet
Gant tut e bro anaveet :
Merch da Jouasim ac Annan
Voa ar bet ane hantic quantan.

Ar gontemplasion huel
Ez eo merch d'an Tad eternal,
Mam Jesus e muian caret,
Ar Speret-Santel e brierf.

Desiret boe pevoar mil bla
Da reparin pehet Eva,
Anonset dre profesio
A clefoa consolin a limmo.

Lavaret dei gant Simeon,
De 'ar Burificasion,
Ar poaniou nije da andurin
Ar mabeic Jesus couds a hy.

Simeon neuse a varvas,
Ac al limmo pa disquenas
A laras d'an tado santel :
Gannet eo Salver Israel.

Ac ar vam a neuz-an gannet,
An temp a meuz ive gulet :
Eur Voerhes a ligne Davit,
Enor e bro, douar Egipt.

Mister an Incarnasion
So leun des admirasion,
Mes impliomp on ol adres
Dober elojou dar Voerhes.

Ar blaves tri hanter-cant,
Hoarveas eur mirac patant
En quichen Rom an Etali :
Enoromp ar Voerhes Vari.

Ian Batris, mignon da Doue,
Na nefoa quet a vugale :
E brierf ac in desire,
Rein o moien vit gloar Doue.

Goulenet o deus sclerijen
Da hout penos guelan rajent
Vit besan da Doue agreab,
Impliman o moien ar fat.

Revelasion o deus bet,
Ar bemp a vis est asuret,
Monet da vene Esquelin,
Dre inspirasion divin.

Ar Pap ive a neveys bet
Avelte ar memeus momet,
Ma hejont en proseusion
D'ar plas-se gant devosion.

Pa arijont voar ar mene,
Ar bemp a vis est a voe se,
A quefchont an aerch plas un illis
Vit aprout desing Ian Batris.

Eno racdal voe batiset
Un temp ar hairan a gafchet,
A laqueet patrones enni
Goerhes an Aerch an Etali.

Da amser ar pap Pol d'ar goude,
Ar vosen ari ar vro-se :
An Etali oe dezolet
Gant mortinans des ar hlenvet.

Mont rejont en proseusion,
Dar plas-se g'nt devoision :
Ar vosen a voe chaset
Ac an Etali consolet.

Eur serpent bras leun a furi.
A desol c'hoas an Etali :
Mari an Aerch voe invoquet
Ac ar serpent voe terraset.

Chetu ase petra neus groet
Ian Batris cols ac e briet :
In vatisas an temp quantan
Don patrones voar ar bet-man.

Goerhes an Aerch a so pedet
Ous ar vosen vel ma clewet,
A visquoas ar Vam buisant
E deus terraset ar serpent.

Credin ran ive, Kerborsis,
Hui neus emitet Ian Batris,
Pa vatisah an temp neve
Vit enorin guir Vam Doue.

Pa hallan transport ma speret
Voar o hilis ac o perret,
A ve raiset ma halon
Gant joa ac admirasion.

Ar hentan objet em rais
Pa hantrean enn o hillis,
Goerhes an Aerch carget a hras
Heus plaset hast dan oter vras.

A pa deu ma speret an dro
Da sellet o stasiono,
Ac a lamp a bep coste
Ra lustro no hillis neve.

Neuse ar gador a guione
So batiset ganneh ive :
E man enni ar Pastor mat,
Voar e gain a toug e danvat.

Ar plas-man dehhu, Kerborsis,
Voar gues al eur chapel ofis

Vit an noblans dimes ar vro
Dober eni o fedeno.

A breman eo illis parous,
Comparajap deur baradous,
Dre o prudans ac o hadres
A protecsion a Voerhes.

Breman so tremen pemp cant la,
An ofis a ret ar plas-man,
Dre urs dom Ian, abat Kerhos,
Servijer Doue de a nos.

Henes ane gomansamant
Voe quantan mest scol sant Ervoan,
En instruas voar ar furnes
Quent vit antren ar santeles.

Sant Ervoan na voe ar bet-man
Nemerd betec hanter-cant la,
Ac an abat a chom da ren
Da dec la a pevoar-ugent.

Dre breuveno e destamant
Voe canoniset sant Ervoan,
A goude e chapel ofis
A neus roet da Kerborsis.

Cals a boan heus bet Kerborsis
Batisan nevelep illis,
Mes ol a voint cavet un de
Merquet voar a levra vuc.

Esperet ariout ar gloar,
Hui gontemplo voar an douar
Ar plas santel-man luquernin
Dre a reilono a Vari.

Goerhes, ma mam a ma itroun,
Acordet o protecsion
Vel da eur laier deo,
Din obtenet eur gontreccion barlet.

Guion ar Gillard neus rimmet
Ar hantic-man en bresonec
An enor dar Voerhes Vari,
E ol esperans so ennin.